

843

61

KLEMMOU

EUR PLAC'H MANKET

Var eun ton trist.

Selaonit breman va mouez, o va c'hamaradezet,
 Choui pere em yaouarkis, a meus bet kals karet,
 Eus a Doullie af Ludu, me ra deoc'h ma c'hemennou,
 Deut holl assemblez gan-in, da veska ho daëtou.

Me a me z kolet breman va reputation,
 Va c'halon a zo karget ha zezolation,
 Dre ma meus kredet, sioas, va facz kamaradou,
 E meus kolet ar c'haëra demeus va bekejou.

Beteg breman me c'halle laret a vones huel,
 E oan kaera fumelen e oa e Breiz-Izel,
 A breman me zo udur etouez an holl verc'het,
 Pa eo va c'haera bouket sioas gan-in kolet.

Hennez oa kaera tenzor e oa bars er bed-man,
 Ne kavin ket enep leac'h, da brena seurt d'ez-han,
 Dre veza deut da gredi kamaradet tréïtour,
 E meus lezet va boket da vonet gant an dour.

Pa deuan d'examina ar voul rond deus ar bed,
 Sioas me wel varnezhi breman kals a verct ed
 Pere zo kollet gante kouls a me ho rozen,
 O veza dent da fiout en komzou tréïtourien.

— 2 —

Va holl gerent zo sioas gan-in dizonoret,
 Va chans a zo dinatur, va flaneden kallet
 Va c'halon zo en hirvoud, kouls en nez vel en de,
 Me a c'houlen er maro, vit diskenn bars em be.

Goude va frajilite, me zo holl ankeuiet.
 E kompreñen barz er stad-trist, e pehini on rentet,
 Beteg breman me meus bet douget kokardeno,
 Breman e m'eus eur bzac'h, eur vaz da vont en dro.

Beteg an oad ugent vloaz, me a meus bet bevet
 Ebars e doujans Doue, evel ma vez gleet,
 Neuze me a oa karet gant an holl em c'hanton,
 Neuze, kamaradezet, oa laouen va c'halon.

Goude me meus bet heuliet, kouls en noz vel en de,
 Ar gwal kompagninez, a zo bars em c'hontre,
 Dre ze me zo mepriset, ebars en Breiz-Izel.
 Ma evrustet er bel-man, zo eet gant an avel.

Ne meus ket heuliet sioas, a is tad na mam,
 Dre-se ne meus ket gallet beva iv'e divlam,
 Greet a meus skonarn vonzard pa gleven anezhe.
 Koulskoude deus bet 'aret ar wironiez din-me.

Lavaret zo bet din-me gant he sur aliez,
 E heul gwal kompagniez, m'je tristidigez.
 Mes dre ma oan c'hoas yaouank, veprisen ho c'homzou,
 A ze ra din-me breman skuil eur mor a zaëlou.

Ma mije bet o c'hredet, heuliet ho gourc'hemen,
 Va buez, kamaradezet, e vije bet laouën,
 Mes pa ne meus ket sentet breman dèmeus ar stur,
 Allas vit deus ar garek, e rankin ober zur.

Noz a de he m'hon en eur stad trist meurbet,
 Awichou me eun tam da zebri, gweach all ne me ket,
 Gouje ma ve erc'h ha scorn, ha ienn bras an avel,
 Keunneud ne mo ket d'ober tan da doma va bugel

— 3 —

C'houi, va c'hamaradezet, goude va holl anken,
 Deuio c'hoas d'am goapaad, gant eur galon laouen,
 Mes mar kemerit an hent, en pehini zo danjer,
 C'houi a pezo evel d'hon da zougen bec'h pouner.

Allas ! kamaradezet, daou hent zo er bed-man,
 An hini gemer an hent mad, deus da zougen bec'h skan.
 N'hep gemer an hini fall, bale war va roujou.
 Deus eun pouner da zougen ha kals a dourmanchou.

Vit war va chouck breman, a zo eur bec'h pouner,
 Hag a meus deus e zougen, kals a boan a miser.
 Dalc'het vezin d'er dougen bøteg fin ma deiou.
 Adieu 'ta d'am yaouankis, ha d'am plijaduriou.

CHOM EN BREIZ-IZEL

(62)

WAR DON ; *Er Finister ez on bet ganet...*

Kinniguet d'ar merc'hed yaouank a
 c'hoanta monn da Bariz

Plac'hik yaouank, perag 'ta tec'hel
 Pell dimeuz da vam ha da dad ?
 Perag kwitâd da vro Breiz-Izel,
 Elec'h out evuruz ha mad ?...

Ankoua ar c'heriou,
 Gand o falz-madou ;
 Enne 'lec'h madou/e kavsez trubuilhou.

O chom en bro da gavel !
 Chom, chom en Breiz Izel ! ! { *Diou weeh.*